

KANTIK INTROUN VARIA AR C'hroazou

Diskan

Kerlouan

*Introun ar C'hroazou, Hor Mamm vat,
Diredet d'ho trugarekat
Kerizlouan, holl en eur vouez,
A gan bennoz d'ho trugarez.*

1
Kerkent m'eo deut ar Feiz kristen
Da-zigas deomp he sklerijenn,
Hon Tadou koz, gant ho gizez,
A reaz e mēan ar Groaz santel.

2
War o mein-hir hag o c'herreg
E savent kroaziou keltiek
Karget en Arvor da embann :
Diskaret eo galloud Satan.

3
Galloud Satan zo diskaret
Ha Jezuz-krist, Salver ar bed,
Gwir Vab eternal da Zoue
Setu hor Mestr hag hor Roue.

4
Patronez vat, ken abred all,
O deuz ho kalvet d'o diwall
hag o deuz dalc'het, e pep ti,
d'ho servicha, d'hoc'h enori.

5
Evelde, Mamm garantezuz,
Ni z'aio dreizoc'h da Jezuz,
Evelde, ni zalc'ho bepred
D'hoc'h enori ha d'ho karet.

6
Ni boanio da gemeret skouer
Diwar ar gwella servicher
Ho pije bet en hor meaziou:
Fransez ar Pont euz ar C'hroazou.

7
Na kaera skouer, e gwirionez,
Bihanig c'hoaz, o vont bemdez,
Dirak eun delven, o Mari,
E touez ar c'hroaziou d'ho pedi.

8
E kreiz e vrud, d'e naonteg vloaz,
Gant ar vreaç'h zu skoet, siouaz!
Ma koll ar gweled, ne goll ket
E fizians ennoc'h? Mamm garet.

9
Daou vloaz e pedo euz a bell,
Troet ouz an delven zantel,
Setu hen pare, dre vuzud,
Pebez estlamm e touez an dud!

10
Ar gweled d'ezan deut en dro
Er C'hroazou, war eul lec'h distro
E savo deomp eur gwir denzor
Eur japelig en hoc'h enor.

11
An delven miret er voger)
Hag e diazez an aoter,
Ar c'hroaziou vezo en o zav
Etal ar japel d'he skora.

12
Ha p'an do pelloc'h Kerlouan
Eun liz gaer, hir-ha ledan,
D'ar C'hroazou vezo digasset
Delven Mamm goz ar Vretouned.

13
En he japelig ken laouen,
Pa vo echu e labour tenn,
Fransez, goude grassou an ti,
A yelo, bemdez, d'ho pedi.

14
Eno, bep sul, e vo gwelet
Leun a garteriz diredet
Da heul eun den lojet gantan
O lavaret ar Rozera.

15
E keit-se Fransez a yelo
Da bardouna, war droad atao,
Betek Santez Anna Wened
Ha da Zant Yann al labouset.

16
D'an amezeien, pa vo tro,
Gant nerz ha douzder e roio
Aliou fur ha pouezet mat
D'ho dougen d'en em zantellat.

17
Epad e glenved diweza,
Bemdez, bemdez e fell d'ezan.
Beza kasset, en eur pallez,
Dirazoc'h d'ober e bedenn.

18
Bûhez ha maro kentelliuz!
Kerzet eo dreizoc'h da Jezuz!
Ha Kerizlouan, holl breman,
A gar ho chapel evel dan.

19
Karout a reont evel Fransez,
Bihan ha braz, sul ha pemdez,
Stouet o c'haloun hag o fenn
Ober dirazoc'h o fedenn.

20
Na grassou kaer ho beuz eno
Rannet da gristenien ar vro!
Dreist holl en amzer ar vrezel:
Mil bennoz deoc'h Gwerc'hez santel

21
Er japel-se, Patronez vat,
Ni zalc'ho d'ho trugarekat,
Ha leun a fizians, ni gano:
Gloar ha meuleudi d'hoc'h hano!

22
Er japel-se, peb tiegez
A deuy da glask ar zantelez,
Rak ni c'houlenno da genta
Karet hon Doue dreist pab tra!

Fransez ar Pont, mab da Visant Pont ha da Vari-Jeann Jacq, Ganet er C'hroazou d'an 12 a viz Gwengolo 1812, a zo maro er C'hroazou d'an 20 a viz Even 1881.

Delven a zinifi e galleg: statue

Delvennig Fransez ar Pont a gouezaz hag a zeaz e daou damm pa zavet ar japel. Ar penn a voe miret er voger hag ar c'horf dindan an aoter.